


skrid 22



taolenn

22

J.L. DEY	Barzhonegoù	p.3
BARBAOU	Ar goulenn-dimezi	p.9
Y. YEVTUSHENKO	Buhezskrid araok an amzer	p.11
A. DUVAL	Barzhoneg	p.19
D. an DANTEG	Evit Anjela Duval	p.20
E.A. POE	Annabella	p.21
TEREZA	Gwengolo	p.23
H. DENEZ	Da Herve	p.25
J. DONNART	Ar sal 28	p.26
MABGWERIN	Barzhonegoù	p.28
KERLANN	Skol Blistin	P.33
J.L. DEY	Talvoudegezh ar skol evit ar brezhoneg	p.45

SKRID

KELAOUENN DISKLERIET HERVEZ LEZENN

KENTAN TRIMIZIAD 1980

MOULET E ROAZHON

TI-MOULEREZH PREVEZ

MEROUR : PER DENEZ

KOUMANANTIT DA SKRID

Koumanant evit 4 niverenn : 30 lur

Kas da : Per Denez
Ar Ri Ploare
29 100 DOUARNENEZ

CCP : P. DENIS - 1499-51 ROAZHON

KAS AR SKRIDOU D'AR MEMES CHOMLEC'H

JL DEY

GLAV HA KER

Glav 'ra war an toennoù dizanv
War frondoù ar geot e ra glav,
Gwer va lunedoù er deus aol
Rak ar glav
Speurennoù-houarn al laboù
N'int ket evit gwigourat ken
Gant an delioù ouzh o flourañ gorrek
Pa gouezhont, war o zalaroù,
War beredoù sklas hor c'hêrioù,
Hor c'hêrioù, paour-keizh mirlec'hioù a zaeloù trenk
Adsked truezus hon tud lakaet war renk :
War-laez, ar re binvidikañ, m'hen tou deoc'h,
Degemer a reont a-raok ar re all
Takennoù aour ar glav da zistanañ o sec'hed,
Da c'houde, ar re -un tammig izeloc'h-izelaf-
Betek an traoñ, betek ar borzhierien
E-giz-se emañ an traoù
A-viskoazh en deus graet glav
Diwar-laez betek an traoñ !

BEV BEPRED

Pa zeu an noz d'ar red
 Bremañ, bemdez, bepred,
 Ez eus skeudenoù e-leizh
 O varradif a-ziwar-laez
 A-bell, eus ur vro ouez
 Dezhi harzoù bresk
 Savet diwar-bouez un iskis a zañvez
 A vez graet an Hufvre anezhañ
 Pell eus al loes, an drez hag ar c'hwez
 E tired engroezioù dindan dec'h
 Ganto briadoù a sonjoù brev en o divrec'h
 Sonjoù o nijal kuit
 Da bep serr-lagad...
 Hag hefivel 'omp bemdez ouzhomp
 Ha ne vefe ket roet deomp
 Bep a vuhez
 Da bep goulou-deiz ?
 Ma ne vefe ket ar Poell anezhañ
 Gant e warded dreistezhomm
 Neuze 'z afe daoulagad bep hini
 En ur bajenn a vent vras
 Deoc'h da lenn warni
 Petra dalv bezañ emsavid
 O rambreal e bro ar sujidi.

KEMENNADENN VIHAN...

D'an ampoent emañ o skrivañ
 Dit
 Dija eo aet da voged
 Planken yen ma zaol-skrivañ
 Amañ ha lec'h-all
 N'eus ket mui anezho ;
 Evel ur bugel em eus disofjet
 Ar boan hag ar c'heuz da vezañ chomet
 Bloavezhioù-pad hep anavout ac'hanout,
 Plac'h yaouank dremmet-mor,
 A-hed da c'hlannoù, bepred pelloc'h
 E skoan etrezek da wazhied glas-oabl,
 Eno emañ eoriet bigi e-leizh
 Disleberet gant da wad red-dired ;
 Eus da c'henou, aezhennoù hollen,
 Trema ma c'horf, gwagoù mibin,
 E ran penn d'un ere bennak
 A vo torret bremaik krenn-ha-krak
 Gant traezh an Amzer...
 Ezhomm 'zo nerzh ha goanag
 Da heuliañ chal ha dichal hor c'hoantoù
 Kellies 'm eus hen graet, bremañ on flak
 Da bep hini e dro da skrivañ
 Ken na vo re ziwezhat...

DISPARTI

E kalmijenn yen ar goañv e nij ur seizenn dispak
Hag un dorn skañv o terc'hel warni
Ar mor n'eo ket brasoc'h eget ur c'hammed
Padal ez ez war an dour digren
Er pelloù zoken emaut o tiambroug
An hini a ya war e giz, a-hed ar c'hae,
Trema skeudennoù all, e-touez mouezhioù all
N'eo ken evit padout ganto
Bep m'emañ o strebotiñ ouzh kadorioù goullo an tavarnioù
Ouzh bankoù pounner an tiez-krampouezh,
Evel un den aet e spered digantañ
Digant e benn a fell dezhañ disoñjal
E c'hell un tamm buhez mont da get aes
O lavarout kenavo d'an hini na zeuio biken en-dro.

Genver 1980

DINDAN GEN AR MASKL

Teir geotenn gwasket e daouarn ur bugel
Daoulagad gwerc'h dindan gen ar maskl
Pikoù pilpous dindanañ, itrikoù diroll,
Ha teir raosklenn war al lenn, o vont da goll....

Genver 1980

PENN-SIL

Toulloù 'zo en Neñv
Klev ar pedennoù o tec'hout kuit anezho
Brav int da vezañ silet gant girzhier da benn
A-drek dezho ez eus pradeier heson
Ha saotroù ruz e-leizh dindan an Neñv...

Genver 1980

SONADENN OUEZ

Garmoù ur gitar deuet eus a-bell
A dregern a-hed gwiskadoù skañv a voged
Prim ha prim 'n em lak da redek
Emañ war nes pakañ stlakadeg
An notennoù pennfollet dindan dec'h
Emañ warnes terriñ ar sonadenn ouez
Ha degas ar breizhenn dizifenn en-dro,
Ne zeuio ket a-benn, a-hont ez eus c'hoarzhadeg,
Dibikouzañ e zaoulagad ne c'hell ket,
Skañvaat e valvennoù kennebeut,
Ken fetis ez eo ar malkennoù eno
O tarnijal a-us d'ar pennoù, a-is d'ar gleuzeur,
Pelec'h emañ an notennoù keizh, lavarit din 'ta,
Ne dalv ket ar boan da deurel klezeadaoù
E-kreiz ar moked, e-keit ha m'emañ hemañ
O c'hланаат traoù ha tud gant e droellennoù frondus,
Tavet eo trumm an hopadeg, aet da get ar sonerezh raktal,
An oristal en deus graet un azez er vrumenn lugus,
Ar gitar en deus kemeret ha flouret e-kuzh,
Hogen chomet eo mut : garm ebet ken, eus a-bell,
Goullo eo ar gambr, diwezhat eo ha ret sevel
Emañ tarzhan-deiz o weañ ar sioulañs
E seiz ar stignoù-prenestr,
E blev ar pennoù beuzet en Hun...
Piv a savo ? Nikun anezho.

Genver 1980

BARBAOU

AR GOULENN - DIMEZI

Ar mell razh Rapronobis
a gar ul logodennig c'hris :

Daoulagad dous,
manegoù gwenn,
gwiskamant voulouz,
medalennoù melen,
na kaerat disklaeriadenn !

Mama Logodenn e selaou ervat
hag a c'houlenn outañ timat :
Kement-se, bepred, n'eo ket a-walac'h,
petra dres a zo en ho yalc'h ?

Ac'hanta, setu :
eme ar razh du.
Me eo kentañ mērer
fourmajiri ar c'harter.
Bez am eus arc'hant a-leizh,
meur a di e Breizh,
ur c'hastell er Bortugal,
ha nouspet tra arall !

Sell ur pried kaer !
eme ar vamm dener.
Deut' ta, raktal, 'barzh an ti
da c'houlenn, du-mañ, dimeziñ !

Fidamdoustik, nann' vat,
ne ran van ebet eus e stad
na kennebeud-all eus e gestell !
Setu petra eo respont an dimezell !

Klevit ! Un hipi eo a fell dezhi,
blev hir outañ betek e izili !

Ma rank ar mell razh Rapronobis
dont tuchant war e giz,
gant e galonad
hag e zaeroù
e yalc'had
hag e fourmajoù !

Paour-kaezh razh kozh du
eme al logodennig dilu
en ur zañsal gant he hipi,
hennezh n'oar ket beviñ !

Hag hi o vont gant he bleveg
n'en deus na ti na gweneg
hogen, en e galon yaouank,
ouzhpenn ur pezh a dalv ur bank !

YEVGENY YEVTUSHENKO

BUHEZSKRID A-RAOK AN AMZER

D'ar 5 a viz Meurzh 1953 ez eus c'hoarvezet un
dra hag he deus hejjet Bro-Rusia : marv eo Stalin.
Ne oan ket evit kredif e oa marv, ul lodenn ken ret
eus hor buhez e oa bet.

Evel seizet e oa bet ar vro. Kement e oa bet
kontet d'an dud e oa Stalin oc'h ober war-dro pep
hini m'en em gavas an dud kollet ha sabatuet da
vezañ heptañ. Rusia en he fezh a leñve. Ha me
ivez. Eus don hor c'halonoù e ouelemp. Gant ar
glac'har, hag ivez marteze gant ar spont dirak ar
pezh a oa o vont da c'hoarvezout.

En ur vodadeg skrivagnerien e teuas ar varzhed
da lenn o barzhonegoù en enor da Stalin, ha torret
e oa o mouezh gant an difronkadenoù. Tvardovsky,
hag en ur mell den korfek, a lennas e skrid gant
ur vouezh o krenañ.

Biken ne zisofjin penaos on aet da welout arched
Stalin.

Bez e oan e-kreiz an engroez e plasenn Trubnaya.
Anal an dud, dekmiladoù anezho stardet an eil ouzh
egile, a save en ur goumoulenn wenn ken fetis ma oa
tu da welout warni ar skeud distabil taolet gant
gwez dizeil miz Ebrel. Un arvest sebezus ha spontus.
Eus an a-dreñv e tinaoue froudadoù tud, o kreskiñ

ar gwask. Ur mor o kornigellat e teuas an engroez da vezañ. Merzout a ris e oan kaset war-eeun etrezek ur peul gouleier-straed. Didruez e talc'he ar peul da zont tostoc'h-tostañ. A-greiz-holl e welis e oa bountet ur plac'h yaouank da skeiñ ouzh ar peul. Distummet oa he dremm gant ur youc'hadenn dic'hoanag na c'helle ket bezañ klevet e-kreiz ar youc'hadeg hag ar glemmadeg. Gant lusk an engroez e voen kaset sko ouzh ar plac'h ; ne glevis ket, met santout a ris gant ma c'horf he eskern bresk o strakal pa voent flastret ouzh ar peul-goulou. Klozañ ma daoulagad a ris gant ar spont. Ne oan ket evit gouzañv ar gwel eus he daoulagad c'hlas bugel, aet diskiant ha dispourbell. Kaset e voen pelloc'h. Pa sellis adarre, ne oa mui plac'h ebet da vezañ gwelet. Emichañs e oa bet lonket gant an engroez, hag aet oa dindan. Gennet ouzh ar peul e oa un den all, kammet e gorf hag astennet e zivrec'h, evel pa vije bet staget ouzh ar groaz. D'ar poent-se e santis e oan o vale war un dra bennak gwak. Korf un den e oa. Sevel a ris ma zreid, ha dezouget e voen pelloc'h. E-pad ur pennad e voen re spontet evit pouezañ ma zreid war an douar en-dro. Startoc'h-startañ e waske an engroez. Gant ma ment vras e oan savetaet. Ar re vihan, flastret e vezent en-bev. Paket e oamp etre ur renknad tiez war un tu hag ur renknad kirri-samm arme war an tu all.

"Kasit ar c'hirri-samm kuit !" a youc'he an dud.
"Kasit anezho kuit !"

"N'hellan ket. N'em eus ket bet urzhioù", a respontas un ofiser polis sabatuet ; yaouank e oa, blev melen, hag e oa tost da leñvañ gant an dic'hoanag. Ha stlapet e veze tud ouzh kostez ar c'hirri-samm, ha friket o fennoù. Gwad-holl e oa kostezioù ar c'hirri. A-greiz-holl e savas ennon ur gasoni spontus ouzh an dra a oa ganet diouti ar garm-se "n'em eus ket urzhioù !" Youc'het d'ar mare end-eeun ma oa

tud o vervel dre c'henaouegezh unan bennak. Evit ar wech kentañ em buhez e save em spered ur soñj a gasoni ouzh an den a oamp o touarañ. En e girlegezh e oa an traoù spontus a c'hoarveze. An "N'em eus ket urzhioù !" se a oa ar penn-kaoz eus an distruj hag eus ar gwad skuilhet da gefver e interamant. Bremañ e komprenen, evit mat hag evit atav, n'eo ket mat gortoz un urzh pa vez buhezioù tud en arvar -ret e vez ober ar pezh zo da ober. N'ouzon ket penaos e c'hoarvezas, met dre forzh poaniañ gant ma daoulin ha ma daou veilh-dorn, e teuis a-benn da vountañ an dud a-gostez en ur youc'hal : "Grit ar chadenn ! Grit ar chadenn !"

Ne gomprenent ket, neuze e lakaen anezho dre nerzh da begiñ an eil e dorn egile, ha me o tisonkañ ar c'hunujennoù lousañ a save em eñvor diouzh ar mare ma oan studier. Un nebeut paotred yaouank skañv ha kreñv a grogas d'am sikour. Ha neuze e komprenas an dud. Reiñ a raent an dorn an eil d'egile hag ober chadennoù. Ar baotred postek ha me a zalc'has gant al labour. Siuoloc'h e teue da vezañ ar froudad. Ne oa ket mui an engroez ul loen gouez dirollet. "Ar merc'hed hag ar vugale er c'hirri-samm !" a youc'has unan eus ar baotred yaouank. Ha setu merc'hed ha bugale, douget dreist hor pennoù, o vont a zorn da zorn war-du ar c'hirri. Unan eus ar merc'hed kaset e-giz-se a stourme evel unan foll, en ur glemmichat. An ofiser polis yaouank, o tegemer anezhi, a flouras he fennad-blev, o klask en un doare diampart he sioulaat. Tennañ a reas an ofiser yaouank e gasketenn, lakaat anezhi war he dremm dezhi, ha neuze e tarzhas da ouelañ.

Pelloc'h e oa ur froudad all o tichadennañ. Ha ni mont di, ar baotred kreñv ha me, ha dre nerzh ar c'hunujennoù hag hor meilloù-dorn, ober d'an dud stummañ chadennoù evit saveteiñ dezho o buhez.

Kregiñ a reas ar polis d'hor sikour.

Sioulaat a reas an traoù.

"C'hwi 'zlefe dont e-barzh ar polis, kamarad, ezhomm a zo eus paotred evel doc'h", a lavaras din ur serjant polis, o sec'hiñ e zremm gant e vouchouer goude ur pennad labour tenn.

"Trugarez. Prederiañ a rin war-se", a respontis dic'hoarzh.

Ha neuze, n'em boa ket mui c'hoant ken da vont da welout korf marv Stalin. E-lec'h mont, e skarzhis kuit gant unan eus ar baotred a oa bet o sikour ac'ha- non da lakaat urzh e-touez an dud, prenañ a rejomp ur voutailhad vodka, ha mont d'ar gêr da evañ.

"Gwelet hoc'h eus Stalin ?" a c'houlennas ma mamm.

"Ya", eme-ve krenn, evit troc'hañ ar gaoz, pa oan o skeiñ ma gwerenn ouzh hini ar paotr.

N'em boa ket lavaret gevier d'am mamm. Ar pezh am boa gwelet, an dra-se oa Stalin.



Kemmañ din ma buhez en deus graet an devezh-se, ha kemmañ ma barzhoniezh ivez.

Kompren a raen na oa bremañ den ebet evit soñjal en hol lec'h, na oa bet morse den ebet. Kompren a raen e vefe dav deomp prederiañ don ha kalet... Ur santadur a giriegezh, n'eo ket evidon va-unan, met evit ar vro a-bezh, a zeuas din, ha sammet e oa va chouk gant e bouez. Ne fell ket din lavarout e komprenis diouzhtu pegen kablus e oa Stalin. Derc'hel

a raen d'ober anezhañ, mui pe vui, ur seurt den-skouer. Dianav e chome un darn vat eus torfedoù Stalin. Met sklaer e oa un dra evidon : ur bern kudennoù a oa en em skoulmet e Rusia, ha chom hep klask diluziañ anezho a vije torfed. An dra-se a soñjen diwar-benn ar varzhoniezh -diwar-benn ma barzhoniezh ha diwar-benn ar varzhoniezh dre vras.

Muioc'h eget gant forzh peseurt hini all marteze, ez eus bet gant ar varzhoniezh rusian ar menoz eus he c'hiriegezh e-keñver ar gevredigezh. Atav eo bet barzhed Rusia ur gouarnamant speredel d'o bro. Pouchkin, da skouer, hag a c'helle displegañ an trivliadoù soutilañ, a zeuas gantañ barzhonegoù-stourm eus ar re dagusañ. Skrivañ a rae :

" Pa drid ennomp karantez ar frankiz
Ha pa zouj hor c'halon enor ar vuhez,
Dav eo deomp, mignoned, reiñ d'hor bro-ni
Ar pep gwellañ a c'hello genel hor spered."

-ul labour dispac'hel ma 'z eus unan evit araokourien yaouank Rusia er mare-se, hag ul labour c'hoazh evit Rusianed Yaouank hiziv. Abeg mat o doa gwaskerien Rusia da spontañ dirak he barzhed. Aon o deus bet eus Pouchkin, aon o deus bet goude-se eus Levmontov, aon o deus bet goude-se eus Nekrassov. Ur slogan a zo bet ijinet gant Nekrassov :

" Pe oc'h ur barzh, pe n'oc'h ket
Den ho pro e rankit bezañ "

Zoken Blok, hag-eñ barrek-souezhus evel barzh ar garantez, a leze a-gostez e emc'houlenn diwar-benn ar merc'hed evit sevel e vouezh diouganus a-du gant e vro. A-benn ar fin eo Maïakovsky a roas d'an hengoun-see stumm dispac'hel ar gwellañ : "Evidon-me eo ar bluenn-da-skrivañ par d'ur vaionetezenn."

Evit un den eus Bro-Rusia, e son ar ger "barzh" evel ar ger "stourmer". Bepred o devez barzhed

Rusia stourmet evit dazont o bro hag evit ar reizhder. Gant he barzhed eo bet sikouret bro-Rusia da brederiañ. Gant he barzhed eo bet sikouret bro-Rusia da stourm a-enep he ziranted.

Hag evel-se, pa c'hoarvezas da Rusia treuzañ, goude marv Stalin, ur prantad diaes en he buhez diabarzh, e voe anat din n'am boa ket ar gwir da chom da ober war-dro ma zammig liorzhanat bihan a varzhoniezh. War ma sikour e teuas barzhed vras bro-Rusia, diouzh o skouer e komprenis e c'hell ar varzhoniezh engouestlet bezañ ken lourennek ha forzh peseurt barzhoniezh all gant ma vo savet a wir garantez. Chom da skrivañ diwar-benn an natur pe diwar-benn ar merc'heñ pe diwar-benn tristidigezh ar bed d'ur mare hag a zo kalet evit ho kenvroiz a zo un dra hogos divoral. Ha kalet e oa ar mare-se evit ar Rusianed.

Ar vedisined a oa bet harzet da geñver an "irienn" a voe lezet da vont.

Sebezet e voe an dud, dre vras e oa bet soñjet e oant kablus. Tud bro-Rusia, ken leun a fiziañs, a groge da soñjal e vez dañjerus a-wechoù kaout re a fiziañs.

Gwelet em boa fas falc'hun Beria, hanter-guzhet gant ur skerb gloan, peg e fri ouzh prenestr e garrlimouzin, pa veze bleniet evitañ goustadik a-hed ar riblenn-stræd, hag-eñ o chaséal ur vaouez evit an noz... An den-se a save dirak tud ar bobl d'ober dezho prezegennoù fromus diwar-benn ar gomunistiezh.

Un akt a reizhder eo bet ar bolod a zo bet tennet e penn Beria -met pegen diwezhat ! Siwazh, un tren a vez hogos atav war-lerc'h eo ar justis.

E Moskov e veze gwelet, o paouez distreñ eus ar c'hampoù-bac'h, prizonidi digabluzet. Ganto e voe desket d'an dud pegen ramzel e oa bet an torfedoù

hag an direizhder.

En em soñjal a rae an dud, stegnet e oant. E pep lec'h e oa santet pegen stegnet e oa an nervennoù. Ne oa ket prezegennoù Malenkov o dije gallet dienkrezañ an dud, hag-eñ un den gant un dremm maouez hag ur vouezh kempennet-aketus, oc'h ober prezegennoù diwar-benn ar gwellaennoù a oa da vezañ hepdale evit pezh a sell ouzh ar boued, an dilhad-war-c'horre hag an dilhad-dindan.

"Lakaomp e c'hellfemp lonkañ gwastilli-dienn pezh a gar, ha gwiskañ abijoù nevez, da belec'h ez aimp gant hon dilhad cheuc'h war hor c'hein ?" Fent a oa gant ar micherour a oa o vevañ en hor c'hichen.

Ar pezh a felle d'an dud eo e teufe unan bennak da gomz dezho en un doare sklaer ha sirius diwar-benn o buhez da zont. Evito e oa bet atav "ar vuhez" kalz muoc'h eget boued, ti ha dilhad. Evito, "bevañ" a oa ivez "krediñ".

Bez e oa un dra bennak a-bouez da vezañ lavaret dezho, met ne gomprenen ket c'hoazh petra 'oa, hag en em gavout a raen kollet ha luziet.

Met marteze ne oa luzierezh evel-se nemet e Moskov, er gorventenn bolitikel a save diwar emstok an darvoudoù. E don Rusia, marteze, e oa sioulder ha peoc'h-spered. Kemer a ris an tren da vont da Zima. Fellout a rae din tec'hout diouzh ma soñjoù du ha diouzh ma spont. Met ma soñjoù ha ma spont a anavezis e komzoù an ijinourien, ar skiantourien labour-douar a oa azezet em c'hichen en tren. Ha pa voen erru e Zima, e oa ma soñjoù ha ma spont er goulennoù kentañ a reas din ma daou eontr -unan anezho rener stol-lad-kirri-kêr, egile gov. Hag e oan deut me d'ar gêr da gaout ar respont d'ar goulennoù-se ! Ar memes traoù a oa e spered an dud, e Moskov hag e Zima. Rusia a-bezh a oa ur mell spered o prederiañ, war-hed ar miliadoù miltirioù a zo etre ar Mor

Baltek hag ar Meurvor Habask.

Ar skeudenn a zo bet roet eus "an den Soviedel eeun" a zo ijinadenn hor c'hazetennoù. Kanet, filmet, lakaet war al leurenn-c'hoari eo bet an den eeun-se, meneget gant lorc'h er prezegennoù politikel. Met gwelout a raen pegen pell e oa e gwirionez da vezañ "eeun"...

(Ganet eo bet Yevgeny Yevtushenko e 1933.
Unan eus barzhed gwellañ ar rummad
yaouank. E 1963 eo bet skrivet e levr
"Buhezskrid a-raok an amzer".)

(Brezhoneg gant Herle DENEZ)

ANJELA DUVAL

- Kollet eo pep tra nemet an Enor
Eme Roue Bro-C'hall d'e vamm
Da noz emgann Pavie
Ma oa troet gantañ an traoù da fall...

- E Breizh eo c'hoarvezet ar c'hontrol
N'eus kollet netra nemet an Enor

Breizh a zo aze evel gwechall...

Aze 'mañ. Met hec'h Enor ?
Hec'h Enor a vro dieub e touez an holl Vroioù,
Hec'h Enor a Berc'henn, pelec'h emañ ?
Pelec'h hag e pe stad
He yezh : ene he fobl ?
He lennegezh. He sevenadur. He hengounioù ?
Ha Feiz hon Tadoù Kozh !...

Breizh a zo aze evel tra an estren
Laeret eo diganti hec'h Enor. Hec'h Ene.
Hec'h Enor a vro dieub.

15 a viz mae 1979

Deneza an DANTEG

EVIT ANJELA DUVAL

1-

Gervel a ran al labous
Evit ma tegasfe dimp
An dra iskis 'oa bet kemennet dimp
(Ha diwezhatoc'h, kalz diwezhatoc'h,
Eo e tougo dimp bruzhunadoù hor flanedenn)

2-

Dindan ar spern gwenn e azezan
Rak hirie on en em staget ouzh an nevez-hañv
- Hag ouzh traoù roget ma bruched,
Mastaret gant gwad ruz.

3-

Skrivañ a ran e-mesk lizherennoù ruz drez ar c'hoad
E-mesk kizelloù an heol hag al linad
Skrivañ a ran e-mesk bleuniadeg agetus ar mouar
Skrivañ a ran gant an nadoz,
Ha neud er gwad, ha lammoù ma c'halon

hervez

Edgar Allan POE (Annabel Lee)

ANNABELLA

Bremañ 'z eus bloavezhioù ha bloavezhioù zo,
En ur vro 'oa hor gwennva,
'Veve ur plac'h a gane hec'h ano
Ken flour d'am skouarn : Annabella.
Hag ar plac'h-se n'he doa ken meno
'Met va c'harout ha bout din karetañ.

Me 'oa bugel, hi ivez 'oa bugel
Er vro-se 'oa hor gwennva,
Met 'n em garemp - kemend-all den ne c'hell -
Me ha va Annabella -
Gant ur feiz a reas d'ar galloudoù neñvel
Hon ereziñ hag aviañ.

Ha sed perak, bloavezhioù ha bloavezhioù zo,
Er vro-se 'oa hor gwennva,
E c'hwezhas an oabl kriz avel yen ar maro
E kerc'henn va Annabella ;
Ken e teuas he c'hoskor fero
D'he c'hemer ha d'he sparlañ,
Pell diouzhin, e don ur c'heo,
Er vro 'oa bet hor gwennva.

An aelez, nebeutoc'h eürus en o faradoz,
Enno gwarizi a oa,
Sed an abeg (an holl her goar, yaouank ha kozh,
Er vro-mañ 'oa hor gwennva)
Ma silas ar gwent put diouzh ar c'hoabroù un noz
Da lazhañ mik Annabella.

Met hor c'harantez 'oa kreñvoc'h kalz eget karantez
Ar re a oa ar goshañ —
Ar re a oa ar furañ —
Ha diouzh o faradoz n'hell ket an aelez
Nag an diaouloù dindan ar morioù an donañ
Biken diouzh va ene distagañ ene kaezh
Ar plac'h kenedet-dreist Annabella.

Al loarne sav morse hep degas em huñvre
Ar plac'h kenedet-dreist Annabella ;
Steredenn ne flammell hep na santfen ar sell
Eus ar plac'h kenedek Annabella ;
A-se a-hed an noz e vezan o repoz
Gant va hini garet — va buhez ha va c'hefrisa
E-barzh ar c'heo don a zo en hor gwennva,
E toull he bez en hor gwennva.

(brezhoneg gant Per DENEZ)

Tereza

Gwengolo

Gwengolo.
Deizioù diwezhañ an hañv
Intret a deneridigezh.
War-lerc'h an touforioù didruez
E tenn an douar e anal
Diheverz.
Ar soul evel ur greouchenn douzet
A velena c'hoazh dindan an heol,
Hag ar raden rous
En em dorp en douvezioù.
En abardaevezh o c'hlazañ
'Mañ dalc'hmat an tropell o taskiriat
Dindan ar gwez-kistin uhel.
A-ispilh ouzh he harz-lamm alaouret
Ez eus ur c'hreunenn skañv o veajiñ
Hervez faltazi an avel glouar.
Brulu roz Mezheven
A vraniskell o fustoù skarnilet
An hañv eo.
Ha koulskoude e santer endeo ar frailh diverzus
M'en em strinko dreizañ warc'hoazh
Glaveier kounnarek Gwengolo,
Ha reverzhi vras ar gedez
A ziroлло hec'h arsailhoù
Ouzh an tevenn dilezet.

Gwengolo.
Noziñ a ra hag al latar
A-ruz — warc'hoazh an diskar-amzer —

A aloub ar pleg-mor
O veskañ e skerboù gwenn-laezh
Gant an diwezhañ gouelioù dispak.
Emañ an heol o vont da ziskenn
A-dreñv da dorgennoù ar c'houmoul limestra.
Fenez marteze e vo enaouet
Ar c'hentañ tantadoù kloer ha drez.
Hag o mogidelloù louet
O kejañ gant al latarennoù gwenn
A zegaso deomp da soñj amzer ur vadinell
C'hwez hor yaouankiz
C'hwez ar vakañsoù
O finveziñ e tenerded
Abardaeziou Gwengolo gwechall.

Gwengolo an ehanou :
Fronn sur an avalou azv
Gouestlet d'an drailherez.
C'hwez siros ar sistr nevez
O tiskenn en donell brenn
E-kreiz safron ar gwenan.
Ha sioulder ar peuznoziou
Didermen
Ouzh garineb ar c'hleuziou
Pa vez gwrez an devezh hañv
O teuziñ e latarenn noz
An diskar-amzer o tostaat.
Iskisat dimezi
A ra deomp riklañ tener
E-pad hor c'housk
Davet un temz-amzer rustoc'h.

Gwengolo.
Henozh eo c'hoazh an hañv
Brav 'vo an amzer warc'hoazh.

HERLE DENEZ

DA HERVE

Kaset gant poanioù ar galon davet hentoù didud
Kezeg rous-tan da follentez ne c'hwirinent
ket ken ouzh heol da wenodenoù,
Aveet gant aour e taoulammet e faoueg
kuzh da venozioù bugel
Pa vez sichennet ken kreñv gwrizioù an ene
Ken n'eo c'hoazh nac'hañ nemet labour
an ijin.
Neuze, sevel e glasentez louedet ar
mintin
ha soñjal eo ret kenderc'hel evel boaz.
Er groazlez-se, du ha touellus
e teue harzoù ar garantez hag ar
gasoni da zimeziñ
el lid kozh ha sakr.
Neuze, gortoz e teuzfe tarzhan deiz
Hag er peuznoz dilezel pep
c'hoant pep heug
Ha marc'hañ da vat marc'h-kalloc'h
ar marv.

AR SAL 28

Harpet e oa Alan ouzh moger ar sal eizh-warn-ugent war eeun ouzh ar mein greun melen teuc'h, e benn gantañ etre daqu eus ur renkad krogou-mantell. Ar gentel c'hresianek a c'hortoze-efñ. Kentel pemp eur. Gortoz a rae, skuizh anezhañ, un dra didalvoud evitañ, gant ur c'helenner a denne digantañ a gentel da gentel, un dudi en deze gwechall o c'hoari gant ul lizherenneg disheñvel : un doare mont da lec'h all. Er-maez.

Dont a rafe-hi eus ar porzh all, dre an trepas a yae e-biou d'ar sal. Aet e oa-hi kuit dija marteze, dre un hent all, petrañant a-raok dezhañ degouezhout dirak an 28 pa oa-efñ o kerzhout en trepasioù all. Nec'het e veze Alan dre natur.

Skañv e oa an amzer en abardaez-se. Flourañ a rae an avel delioù an tilh ha plijus e oa dezhañ sellout ouzh ar gwez a cheñche a-greiz-tout glas o delioù ganto, pa veze c'hwezet war o zu-gin, glas-sklaer anezhañ, kazi gwenn, ur marzh. Bez 'oa ouzhpenn-se gouloù klouar an heol o lufrañ war derdu ar porzh bihan, war dorioù ar salioù ivez.

A vare da vare e teue Tud e-biou d'Alan. Liseidi a chome amañ da gousket pe blac'hed a veze krog da erruout evit skubañ ar salioù skol gant o c'helorniadoù dour lous. D'an eur-se e tegouezhe da Franz, ur c'hamarañ, tremen. Ma vije-hi aet e-biou dezhañ pa oa o kaozeal

gantañ, e vije tapet brav.

Myriam : an anv-se a blije dezhañ dreist-holl, krogiañ hag echuiñ a rae gant ar memes lizherenn : munud. Ne felle ket dezhañ soñjal e-barzh ar pezh en dije roet plijadur dezhañ : Karantez. Ur ger uzet anezhañ. Hoalet e veze Alan gant seurt pozioù goulo. Met stourm a rae start, al labour, ar vachelouriezh da gentañ, ar gelennerien da gentañ selaou ha skrivañ. Plijus e veze dezhañ. Koant e oa Myriam. Un doare bravder a zeu eus an emzalc'h eus neuzioù an dremm ha n'eo ket eus al linennoù, ar stummoù. Peurvuiañ e veze Alan kollet, dalc'het e spered gant soñjoù a bep seurt, diwar forzh petra, lakaat a rae an disterañ tra anezhañ da dec'hout kuit barzh e huñvreoù. Parano sur 'walc'h. N'eo ket un empenn veze gantañ, un toull, un islonk kentoc'h.

He daoulagad a veze bepred laouen, o vousec'hoarzhin. Ne gomprens ket efñ penaos e c'halle-hi bale gant ar mousc'hoarzh-se. Digor. Tizhet he doa anezhañ ar wech kentañ ken ez ae en dro forzh pegement ijin diroll ar paotr.

Soñjal 'rae Alan enni bremañ. D'ar muiañ tout e oant tost an eil ouzh egile betek pemzek sañtimetrad evit bremañ. Pa vezent azezet kichen-ha-kichen, teir gwech ar sizhun, d'ar c'hentelioù saozneg. Dre-greiz soñjal e troas e benn, dres pa oa-hi o tremen. Buan-ha-buan e teuas dezhe bep a vousec'hoarzhadenn brim war o fas.

- Salud, komzet o doa asambles. Mall a oa warni, sur a-walc'h, rak ne chomas ket a-sav. Manet e oa dirak daoulagad Alan "dreistnaturel" mousc'hoarzhadenn Myriam a greda dezhañ e oa bet dousoc'h eget evit ar re all. E walc'h en doa bet. Derc'hel a rafe soñj pell, pell, pell.

MABGWERIN

NOBLANSOÙ A-VREMAÑ

Gwir Varc'heien int :

An denig kozh ha treut
O tont bep meurzh da noz
Da reifñ e nerzh evit yaouankiz
Deut a bell da vrezhonegañ

Ar goueriadez baour, klañv he c'halon,
O skrivañ, o kontañ deomp
Keloioù an Douar he deus graet hi
'Pad keit all war e dro

An den yaouank o foetañ hentoù
Bro Plinn, e vagnetofon gantañ
Dindan forzh petore amzer
O tennañ teñzorioù eus ar fank hag ankounac'h

Ha mil all ouzhpenn
O stourm dibaouez
Ouzh lanv du ar gallekadur

Ya, noblansoù int tout
N'o deus na madoù na leve
Nemet re o bolontez hag an Enor

14-12-1979

NE LARIN SEURT

Arri oa ar gestapo
Pe ar polis rus
Pe an srpj
Da zastum emsaverien

Dastumit ac'hanon mar keret
Sort ne larin

Ne rit ket 'met koll ho amzer

Kaer ho po reifñ aour ha brud din
ne larin seurt

Ne rit ket 'met koll ho amzer

Kaer ho po lakaat goulou em daoulagad
ne larin seurt

Ne rit ket 'met koll ho amzer

Kaer ho po eñsultif ma hendadoù
ne larin seurt

Ne rit 'met koll ho amzer

Kaer ho po menasif ma mestrez
ne larin seurt

Ne rit ket 'met koll ho amzer

Kaer ho po lakaat ac'hanon da wadañ
ne larin seurt

Ne rit ket 'met koll ho amzer
ne larin seurt

22-12-1979

HON HENDADOÙ

Hon hendadoù na oant ket tud laosk
Mod all vijent bet taolet barzh ar mor
Gant an Arvoriz.
Hon hendadoù

Hon hendadoù na oant ket tud laosk
Savet o doa kêrioù en mein
Savet o doa teir rouantelezh
Hon hendadoù

Hon hendadoù na oant ket tud laosk
Graet gante parkeier ed, gwinizh, melchon
Eus kozh koadeier
Hon hendadoù

Hon hendadoù na oant ket tud laosk
Graet gante ur vro, unan gristen
Eus an Arvorig
Hon hendadoù

Hon hendadoù na oant ket tud laosk
Bountet gante ar Frañsijen
Maez ar c'hourenez
Ya, hon hendadoù

Hon hendadoù na oant ket tud laosk
Na oant ket udebisted
Met efêlbeed ne laran ket
Hon hendadoù

22-12-1979

KERLANN

AR PLAC'H A C'HORTOZE

Laret o doa e oa ar c'hoñfor an doue nevez
Ar plac'h a c'hortoze
Sioulig
'N he menajig
Ken 'vije arri fin d'an diroll
Derc'hel a rae da laret he fater d'an Aotrou
Da zebrif pato 'n he c'haoter

Laret o doa e oa ar blijadur an doue nevez
Ar plac'h a c'hortoze
Sioulig
'N he menajig
Ken 'vije arri fin d'an diroll
Derc'hel a rae da lenn ha da brederiañ fonnus
D'ober war-dro an Douar ken madelezhus

Laret o doa e oa an arc'hant an doue nevez
Ar plac'h a c'hortoze
Sioulig
'N he menajig
Ken 'vije arri fin d'an diroll
Derc'hel a rae da vevañ diwar nebeut
Hi hag he loened mut

Laret o doa e oa ar radiotele an doue nevez
Ar plac'h a c'hortoze
Sioulig
'N he menajig
Ken 'vije arri fin d'an diroll
Derc'hel a rae da skignañ skridoù
Dre ar bed holl

Aet o doueed d'an traoñ an eil warlerc'h egile
Pezh a ziskwel 'vat na oant ket doueed
Ne chom nemet ludu dezhe da adoriñ

23-12-1979

Mezviñ a ran ganit
 Drezout eo e welan ar bed
 E klevan an Douar
 O kanañ
 Hag an dud vunut
 O labourat.
 Ne vern din ar boan a vremañ
 Nag an hini a deuyo warlerc'h.
 Aet on mezv
 Abalamour dit
 Chouchenn out
 Chufere Traoñ-an-Dour
 Chouchenn ar Gerneue
 Evaj an doueed
 Lañgaj ar re zaonet
 Hollvedel out
 Partout war ar blanedenn
 E vez difennet d'ar pobloù
 Komz ò yezh dezhe o un'
 Difennet eo heuliañ e hent e un'
 Difennet eo divizout
 'Vit 'pezh a sell ac'hanout.
 Da betra servijfe neuze
 Ar vistri hag ò mevelien ?
 N'eus ket 'met ul lañgaj
 O talvezout evidout : ar 'sentuzeg'
 T'eus ket komprenet ?
 Kae da zeskiñ prizoneg !

SKOL BLISTIN

1942 - 1944

Edon sekretour Strollad Broadel Breizh evit Penn-ar-Bed en hañv 1942 gant an Aotrou Herve Delaporte, pa ris va menoz sevel ar gentañ skol vrezhonek bet biskoazh, da vihanañ unan a rofe an holl zeskadurezh e brezhoneg nemetken.

D' an hañv 1942 e voe savet ivez, gant an Itron Kemere-Jaouen eus Kemper, Yann ar Beg, Per Heussaff ha re all, ur skol-hañv evit ar vugale, a reas kalz a berz. Skol-hañv Sant-Ildud, evel ma voe anvet, a voe dalc'het e Beg-Meilh (Bro Gernev) e Kerledan. Ar bloaz war-lerc'h e voe dalc'het unan all eno adarre. Va mab henañ, Mikael, a oa unan eus ar vugale a yeas er skolioù-hañv-se.

Ur bloaz kentoc'h, an Aotrou Miard, Enseller-Meur ar Skolioù stad e Prefedti Kemper — d' ur mare m' am boe bet trubuilh gant va « mistri » en doa diskleriet dirazon : « *L'enseignement de votre langue, vous ne l'aurez jamais !* ». Pell 'zo ne vagen spi ebet war an tu-se.

Gant skouer Skol-hañv Sant-Ildud em boa mall ivez seveniñ va mennad : kelenn ar brezhoneg evitañ e-unan, ha, gwelloc'h c'hoazh kelenn e *brezhoneg* an holl zanvezioù-skol, da brouiñ, paneve ken e oa gallus deskiñ bugale dre ar brezhoneg.

Dambrest e oa ar c'hentelioù ragaozet adalek ma voe bet krouet Ar Falz gant Yann Sohier. Meur a fichenn a oa bet savet, dreist-holl evit kelennadurezh ar yezh : geriaoueg, gramadeg, poelladennoù a bep seurt. Dastumet e oa bet testennoù skrivadennoù, ur strolladig brav a varzhonegoù diouzh bezañ fiziet en eñvor bugale. Diwezhatoc'h e voe ret krouiñ kentelioù all : istor ha douaroniezh kentelioù war an traoù (skiantoù), ar riñvañ — ur ger nevez, kinniget gant Kongar evit « jediñ » da dostaat ouzh ar verb kembraek *rhifo*, kontañ.

Ar pal kentañ a oa kemenn digoridigezh ar skol.

Setu amañ al lizher skrivet gant Kerlann da Yannig Fouere evit kemenn da hemañ e oa savet ar skol ha da c'houlenn digantañ e skoazell :

Châteauneuf-du-Faou, le 10 octobre 1942.

Mon cher Fouéré,

Las d'attendre un enseignement officiel du breton qui ne vient pas, je décide de fonder la première école *tout en breton*.

Elle s'ouvrira à Plestin (Côtes-du-Nord) dans les premiers jours de novembre. A cet effet, je viens de louer le pavillon annexe de l'Hôtel Beauséjour, route de Saint-Efflam à Plestin.

Je ne sais comment je réussirai à faire face aux dépenses que j'engage. *Je pars à zéro !* Mais en toute chose il y a du risque. Ce risque je l'accepte, comptant sur les dons de toutes sortes qui, je l'espère, ne tarderont pas à parvenir à l'école, qui sera aussi un pensionnat.

Nous avons besoin de tout, notamment de meubles pour la salle de classe, de fournitures pour les élèves (limités à 8 ou 10 enfants pour un début), mais nous avons besoin *d'argent*.

Je compte sur toi, mon cher Fouéré, pour : « diğas dour d' ar vilin » (amener de l'eau au moulin) par tous les moyens dont tu disposes (presse, relations, etc...).

De l'aide que je recevrai dépendra le succès de l'école, mais je suis résolu à persévérer *envers et contre tout*.

Bien à toi pour la Bretagne,

J. DELALANDE (KERLANN).

P. S. : Les dons devront m'être adressés *personnellement* à : J. Delalande-Kerlann, aux Fontaines, *Châteauneuf-du-Faou*, jusqu'au 3 novembre, et à Jean Delalande (Kerlann), route de Saint-Efflam, *Plestin-les-Grèves*, C.C.P. 238-54 Rennes, à partir du 3 novembre.

Troidigezh :

Kastell Nevez ar Faou, d'an 10^{vet} a viz Here 1942.

Yann Fouere ker, (*)

Skuitzh o c'hortoz en aner ma vo kelennet ar brezhoneg a-berzh stad er skolioù, ober a ran va menoz krouiñ ar skol gentañ e *brezhoneg penn-da-benn*. Digoret e vezo e Plistin (Bro-Dreger) e penn kentañ miz Du. Evit-se emañ o paouez

(*) Al lizher-mañ a vo embannet war niverenn 93 (18 Here 1942) ar gazetenn sizhuniek ARVOR, dindan an talbenn : GALV !

feurmiñ adti Ostaliri Beauséjour, war hent Sant Eflamm, e Plistin.

N'ouzon dare penaos e teuin-me a-benn da ober penn ouzh an dispignoù a rankan da ober. Mont a ran war-raok *hep netra !* Evit ober tra pe dra avat e ranker sammañ un tamm riskl. An tamm riskl-se a gemeran, o kontañ war an donezonoù a bep seurt a zeuy dizale, spi am eus, evit ar skol ; houmañ a vo, ouzhpenn, ur skol-lojañ.

Kement tra a ra diouer dimp, er penn-kentañ arrebeuri evit ar sal-skol, diankachoù-skol evit ar skolidi (8 pe 10 bugel hepken, evit kregiñ) met arc'hant eo a faot.

Kontañ a ran warnout, Yann Fouere ker, evit « degas dour d' ar vilin » gant ar skoazell a c'helli reiñ (pennadoù war ar c'helaouennoù, tud a anavez, hag all...).

Diouzh an harp a vezo roet din eo e ray berz ar skol, graet eo va soñj avat kenderc'hel *daoust da bep tra*.

Ganit a galon evit Breizh,

KERLANN.

G. S. : An donezoù a ranko bezañ kaset din-me : Yann Delalande-Kerlann, Ar Feunteunioù, Kastell Nevez-ar-Faou, betek an 3 a viz Du, ha da : Yann Delalande (Kerlann), Hent Sant Eflamm, Plistin, Kont-red-post 23854 Roazhon, war-lerc'h an 3 a viz Du.

War niverenn 99 ARVOR (29 Du 1942) e vo embannet ar pennad-mañ da heul :

UN NEBEUT DISKLERIADURIOU DIWAR-BENN SKOL
BLISTIN, gant KERLANN

...Ur goulenn a zo bet graet din : hag ar vugale a c'hello mont d' an iliz, d' an oferenn ha d' ar c'hatekiz, mar deo se youl o c'herent ? Sklaer eo da gompren : eo ya ! ar respont. Kaset e vezint d' an iliz ha graet e vo rik-ha-rik hervez youl ar gerent, e pep poent.

Darn all a zo chalet gant niver ar skolidi hag ez aliont ac'hanon mont da gaout ar gerent, pe skrivañ dezho evit ma kasint o bugale. Brudet a-walc'h eo ar skol, kenabred, ha labourioù all am eus da seveniñ. Pep hini, a-hend-all, a zo bras a-walc'h da c'houzout pelec'h emañ e zlead.

N' on ket e chal gant an niver bihan a skolidi. Aesoc'h kalz e vo prederiañ outo a-zoare. Bevañ, deskiñ bevañ a vo da ober da gentañ. Du-mañ e vezint savet en un tiegezh breizhat-rik. Boued a vez kavet er vro-mañ, koulz ha n'eus forzh e pelec'h e Breizh — a drugarez Doue — ha maget e vezo ar vugale diouzh ar c'hentañ, peogwir ez eus bet donezonourien vrokus (1) o deus kaset bouedoù-mir a bep seurt ha na gaver ket ken da brenañ. Lojeiz o devo; bras a-walc'h eo an ti. Eveshaet e vezo warno hini dre hini, gwelloc'h kalz, ha karan-tezusoc'h, eget ne vern e peseurt skol o kemer pañsionidi. (Priz ar pañsion a zo pemp kant lur ar miz evit ar bugel kentañ; daou c'hant hanter-kant lur hepken evit an eil eus an hevelep tiegezh.) Savet mat e vezint, boazioù mat a virint e-pad o buhez a vo plantet enno. E-keñver ar ouiziegezh, gwel eget er skolioù gallek e klaskin ober. Skoazell am eus kavet eno ivez digant skolaerion eus an Emsav (2), am sikouro da stummañ kelennadurezh Breizh nevez. Petra lavarinn-me ouzhpenn? nemet e kav din ez on bet pell a-walc'h war ar vicher (unnek vloaz, pe dost) ha, dreist-holl, e karan ar vugale.

❖

Skoazell am eus kavet evit sevel ar skol digant an holl Vreizhiz emskiantek, reizh gant o menozioù. Lod o deus kaset arc'hant. A zo mat. Lod o deus graet gwelloc'h, profet ur skodenn viziek, savet kestoù. Re all o deus graet gwelloc'h c'hoazh: kas pakadoù ha profañ traoù a c'hellent dioueriñ. A-walc'h a ziankachoù-skol hon eus bremañ, a-walc'h a daolioù ivez. Siwazh, er mareoù-mañ, gant arc'hant zoken ne gaver ket atav da brenañ. Diouer hon eus a weleoù, pevar gwele-bugel hag unan pe zaou evit tud vras (ar vatezh (3) hag ar c'houarnourez, an dimezell Suzana Bourdet eus Fouen). Kemend-all a dreuzweleoù, matarasennoù, gwinterlegoù a vije ret. Teir armel a vank evit klenkañ dilhad ar vugale, an traoù-skol, al listri. Kozh pe nevez, e rafent mat an afer. Pep

- (1) Yann Bricler a oa henneth, gwerzher krampouezh dantelez « Les Gavottes » e Kemper.
 (2) Yann Bourc'hiz, Per Heussaff, Keravel.
 (3) Anne-Marie L'Haridon, 23 bloaz, eus parrez Fleiben. Kuitaat a reas ac'hanomp evit dimeziñ ha war he lerc'h e teuas Anna Fouenant, ugent vloaz, eus parrez Molan. Brezhoneg hepken gant an eil hag eben — evel oa dieet. Anna a chomas penn-da-benn ganeomp hag e voe feal ha kalonek e-kreiz an trubuilhoù a oa da zont.

bugel, er skol, en devo un daolig diouzh e vent. Dek a zo bet lakaet ober, dek kador (kadorioù-pleg a vije dispar) a zo da gaout, a-gevret ganto, diouzh ment bugale 6-10 vloaz. Pelec'h o c'havout?

Setu, dre ar munud, an traoù a vank deomp c'hoazh:
 12 torchouer, 2 lien koaret bras evit an taolioù, ur pod-kouez bras (pod-birviñ dilhad) a dalvezo ivez da gibellañ ar vugale, ur bodez houarn vras, ur pod-laezh bras (etre 2 pe 5 litrad), ur broust gwalc'hiñ an dilhad, broustoù evit ar gwis-kamantoù hag evit ar botoù (pep bugel a vezo desket dezhañ pe dezhi ober ganto bemdez). *Kinnigit a bep seurt traoù a c'hellit dioueriñ, betek ur soufletez da c'hwezhañ an tan!*

Ar roll traoù-se a oa bet savet gant sikour va gwreg, a oa war he chouq *pep preder danvezel* hag a ouie, gwelloc'h eget nikun, ar pezh a zo ret da gas un tiegezh en-dro, dreist-holl un tiegezh vras. Ar pep muiañ eus an diankachoù-se a voe kavet da brenañ (gweleoù hag armelioù ivez) er gwerzhioù, a gustumemp mont dezho tro-dro da Blistin, diouzh m'en em gave.

Kavet e voe arc'hant a-walc'h evit kregiñ. Ar profer kentañ, an Ao. Henaff, e Roazhon, a ginnigas pevar mil lur, an Ao. Basset, rener Ti-moulerezh Kenwerzhel Breizh, a roas daou vil lur, ha Roparz Hemon, e anv Ensavadur Breizh, a brofas pemp mil all.

Meur a hini a voe war-lerc'h, profoù disteroc'h a-wechoù, kant pe daou c'hant lur nemet ingal e teuent gant Breizhiz penn-kil-ha-troad — enor dezho. Re hir e vefe roll an anvioù. Ker Vreiz eo, ha Pariz a zalc'has ar skol en he sav gant un harper kalonek, diehan, an Aotrou Andreu Daniel, eus SAV (Strollad ar Vrezhonegerien), bennoz dezhañ ha d'an holl a roas dezhañ « *Diner ar Skol* » (*) evit Skol Blistin.

Ar profoù all a oa degemeret mat ivez. An Aotrou Daniel a gase gwispid vitaminet, evel ar re a oa rannet etre ar skolidi er skolioù d'ar mare-se. Ar brezel a oa, ha strishadurioù da heul, siwazh.

Lod all a gasas diankachoù skol: kaieroù, kreionoù, pluennoù, sklentennoù. Reoù all livaj, lienaj, arreburi. An Aotrou Jorj Rual, eus Roazhon, a reas taolioù ha kadorioù dispar
 (*) Karnedoù a voe moulet hag a dalvezas d'an dastumerien profoù da lakaat anvioù ar roerien. Miret int bet, evel rolloù all ar broferien, a vo ret embann, en ur seurt « Taolenn a Enor ».

diouzh ment pep bugel ; an Aotrou Yann Briker a brofas boued, konfitur hag all ken priziüs er mareoù-se a zienez !

Digoret ar skol, e oa ret gortoz bugale da zont, ha n'eo ket chom da c'hortoz e oa da ober, nemet skrivañ, embann pennadoù. Daoust hag e teuje skolidi ? Kement o devoa youc'h et tud zo : Ar brezhoneg er Skol ! Goulennet hag asgoulennet : A, pegoulz e vo ur skol vrezhonek dimp ! Bremañ e save digareziou : Re abred eo evit sevel ur seurt skol ! N'emaomp ket er pal-se c'hoazh. — Lod a gave e oa ur skol e-lec'h ma vije graet politikerezh (hini an emrenerien evel just), lod all a lavare c'hoazh e oa un druez ne oa ket ur skol gristen. Ha daoust hag e vije barrek ar skolidi da dremen an arnodennoù gallek ?

Gudren (Andrev Jafrez) a vruzhune an digareziou toull-se hag, en o zouez, an abeg en doare-skrivañ KLT'G, a voe graet gantañ e Skol Blistin azalek an derou kentañ.

« Evel ma vije muioc'h a ziaesterioù, emeve, evit bugale oc'h « ober gant « zh », « v » pe « u » vrezhonek eget gant ar « ph » ar « pt = s » pe an « ent » gallek ! » Digareziou...

« Ne vo ket adsavet ur *Vro*, nag ur *Vroadlezh*, nag ur « *Youl Vroadel* gant arc'hant nemetken. Gant oberoù, gant « oberoù an holl marteze, ne lavaran ket !... »

« ...N'em eus skouer ebet da reiñ da zen. Kavout a ra din « evelato e rankan da lakaat va oberoù diouzh va c'hre-« dennoù. Ne sellin ket ouzh an amzer-dremenet, o vezañ eo « bet va bugel en ur skol all, ne sellin ket ouzh ar gudenn reli-« jiel er skol, nag ouzh an doare-skrivañ, ne sellin ket ouzh « kudenn an arc'hant, nag ouzh hini anv ar skol, evel darn.

« Krouet eo bet ur skol vrezhonek penn-da-benn, an hini « gentañ, an hini nemeti. N'em eus dibab ebet da ober. Hini « ar re wellañ e vo. *Eno eo e kasin va bugel.* »

Evel a welor sach-disach a voe kavet e-leizh pa voe savet Skol Blistin. Daoust d'ar profoù stank (ar richerioù bihan a ra ur stêr vras) e tigoras ar skol gant diaesterioù e-leizh, a voe kompezet tamm-ha-tamm. Ouzh an daol nemeti, unan vras avat e voe bodet ar skolidi : ur wech d'ar beure, ur wech da greisteiz, ur wech diouzh an noz. Atav an hevelep kentel : frazennoù berr, pemdeziek, desket dindan eñvor, en ur ober ar jestroù ret, diouzh ezhomm. Ne oa ket stank ar skolidi, met

tri brezhoneger a oa, hag an daou all, pe dri all, Roazhoniz anezho, ne voent ket pell da ober evel ar re all. Ar pal kentañ a oa deskiñ dezho komz, ar buanañ ar gwellañ. Da gentañ, ouzh taol, gant ar predoù, ne oa graet nemet gant ar brezhoneg. Neb a ouie, a dape. Ret-mat goulenn e brezhoneg ha trugarekaat. Gwech ebet avat ne voe difennet komz e galleg. Aliet e oad avat da gomz e brezhoneg. Bep noz, da goan, e oa lennet ar poentoù mat roet d'ar bugel-mañ-bugel, bet klevet o tistagañ ur frazenn e brezhoneg mat, e-doug an deiz, hag er-maez eus ar c'hentelioù evel just. Souezhus, gant ar c'hoarioù, penaos e teuas trec'h ar brezhoneg.

Pa en em gavas skolidi all, hini hag hini koulz lavaret, e voent aloubet gant brezhoneg ar re all.

Nav skoliad a oa, ha war an nav-se, *tri* hepken a oa komzet brezhoneg outo er gêr hag a oa gouest da gomz pa zeujont d'ar skol. A-benn c'hwec'h miz e oa nav vrezhoneger anezho.

Setu amañ o anvioù.

ROLL AR SKOLIDI (1943-1944)

Mikael KERLANN	ganet e Sant Wenole-Pennmarc'h d'ar 14 Gwengolo 1936 (brezhoneger). <i>Ger-stur</i> : « KALONEG A DRECH PEP TRA ».
Erwan JEUSSET	ganet e Roazhon d'ar 22 Kerzu 1932. <i>Ger-stur</i> : « D'AL LABOUR EVIT MA BRO ».
Arzel JEUSSET	ganet e Roazhon d'ar 24 Mae 1931. <i>Ger-stur</i> : « WAR ROUDOÙ HON TADOU ».
Anna CATTELIOT	ganet e Roazhon d'ar 29 Ebrel 1936. <i>Ger-stur</i> : « KARANTEZ IIA GWIRIGNEZ ».
Mari-Jo STEFAN	ganet e Kastell-Paol d'ar 26 Here 1930. <i>Ger-stur</i> : « BREIZH ATAV ».
Roparz DERRIEN	ganet e Brest d'ar 10 Ebrel 1935. <i>Ger-stur</i> : « WAR-RAOK BEPRED ».
Herri DERRIEN	ganet e Brest d'ar 26 Kerzu 1933. <i>Ger-stur</i> : « EVEL GWECHALL ».
Patrik GEFFROY	ganet e Lanuon d'ar 7 Ebrel 1934 (brezhoneger). <i>Ger-stur</i> : « TEVEL HAG OBER ».
Gaid GEFFROY	ganet e Kemper d'ar 4 Ebrel 1936 (brezhoneger). <i>Ger-stur</i> : « A GALON VAT ».

(Pep bugel a zibabe ur ger-stur a verte war golo e gaineroù.)

Ger-stur ar skol a oa :

N'EUS EHAN HEP LABOUR
HEP STOURM NE VEZER KET TREC'H.

Diwar neuze e voe gellet kregiñ e gwirionez gant ar skol, ha reiñ an deskadurezh e brezhoneg penn-da-benn da gentañ : lenn ha skrivañ. Gant ar brud o redek e teuas gweladennerien war-du ennomp (1). Unan anezho, R. Y. Huon, hor mignon mat, a skrive evel-hen diwar-benn ar skol :

« P'on aet e-barzh e oad krog d'ober skol. Goude bezañ bet degemeret kalonek gant an Ao. Kerlann ha gant ar vugale o-unan, a respontas gant o holl galon d'am « demat » e c'hellis klevout anezhe o lenn war al levr kaer Lommig. Goude-se ar skolaer a ziskouezas din kaieroù ar vugale : skritur, daspugnadurioù, diskontadurioù ha niveroniezh, pep poelladenn dispartiet gant tresadurioù keltiek hag eeun-meurbet.

E-pad an amzer-c'hoari e welis an ti eus krec'h d'an traoñ. Ar vugale a zebr ouzh an daol vras, holl a-gevret evel er gêr, e darempred tost ha flour gant an tiegezh.

Pa zeujomp en-dro d'ar c'hlas edo ar vugale o c'hoari « Itron ». Gaid, ur plac'h vihan, he flezhennoù en-dro d'he fenn, a aoze ar pred war ur fornigell vouk. Mikael, oc'h ober war-dro ivez, en doe neuze ar gwalleur da c'houlenn :

« — Ha petra a vo graet evit an dessert ? » Kerkent e voe gourdrouzet. N'eo ket gant ar mestr, nann, met gant Gaid, a lavaras dezhañ, fuloret :

« — N'eo ket evel-se e vez lavaret : an dibenn-pred eo, n'eo ket an dessert. »

An Ao. Kerlann a zisplegas din e zoare d'ober gant ar vugale evit o c'helenn (2). Implijet e vez an doare strollek, an hini kontrol d'an doare dielfennañ ma reer gantañ war ar galleg (3). Graet eo an doare-se kalz muioc'h hervez spered ar vugale, hag an deskadurezh-se a zo kalz bevoc'h eget eben.

A-raok mont kuit em eus sellet en-dro din : war ar voger e oa kartenn Vreizh, a-us d'an daolenn du ur bannielig Breizh, izeloc'h un denenn troad-leue (4) staget ouzh ar voger gant an anv. ur bod kelenn ; ar c'hentelioù war an traoù ne vezont ket ankounac'haet.

Ur prenestr bras a zigor war al leur : ar maezioù a zo dirak an ti, ar mor pelloc'h a-dreñv. Goude ur c'hard- eur bale

(1) Hag ar veleien ne vezent ket ar re ziwezhañ ! An Ao. Jacob, ar c'homandant a reas ar goulenn evit ar brezhoneg ouzh ar Prezidant Wilson, o chome e Toull-du-Herri, a veze ivez war-dro alies.

(2) Evit deskiñ lenn.

(3) Bremañ e vez graet gant an doare strollek muioc'h-mul.

(4) Anv ur blantenn : arum.

e c'heller tizhout an aod, hag en hañv, pa vez brav an amzer, ar vugale a ra baleadennoù dispar a-hed ar mor dre ur wenedenn. Tu a zo d'en em ziskuizhañ e disheol ar gwez-pin ha da studiañ ; goude ez eer war-raok oc'h envel pep plantenn ha pep loen a gaver dre al lenneier, pe o sellout ouzh ar mor o lufrañ hag ouzh ar bigi stouet o gouelioù gwenn, o seblant-tout pigosat ar mor eonnek. Diskenn a reer neuze war an traezh ken tener, « Traezh ar Veleion » pe « Tosenn ar C'hozh », daou oufig goudoret ma c'heller ober embregerezh-korf kement-ha-kement enno.

Setu buhez bugaligoù eürus skol Blistin...



Peurliesañ e oa graet ar c'hentelioù bras d'ar mintin. Goude lein avat, e staged gant ur gentel skritur, ha neuze er-maez ! Eno eo e oa graet ar c'hentelioù war an traoù (1). Alies e oa skouret un daolennig du ouzh ur brank balan ! Ar c'hentelioù istor a oa graet e dismantrañ iliz kozh Sant Jestin, war an uhel, pe e lec'h all. Ar c'hentelioù douaroniezh a oa graet war vord an oad (an traezh a dalveze da verat da vont da ledenez, penn-tir, strizh-douar, brec'h-vor).

Meur a daolenn an amzer a zo bet en implij e Skol Blistin. Setu amañ da heul, evel skouer, div anezho.

Taolenn an amzer

An euriou-skol a oa evel-hen : 8 eur 45 da 10 eur 30 d'ar mintin, neuze un amzer-c'hoari, hag eus 10 eur 45 da greisteiz ; goude pred ec'h adkroge skol da 14 eur betek 17 eur.

Bemdez e veze tennet an anal, an holl brenester digor, e-pad pemp munut.

Da gentañ e kroged bep eil devezh gant displegerezh, pe c'hoazh kan. Ar gentel gentañ da c'houde a oa : jediñ. Goude-se e oa tro ar brezhoneg (*Lun* : Reizhskrivadur ; *Meurzh* : Geriadur ; *Merc'her* : Yezhadur ; *Gwener* : Pleustradenn-brezek ; *Sadorn* : Eilskrivadenn ar re vihan, sevel frazennoù ar re vras).

War-Jerc'h an amzer-c'hoari e oa 45 munutenn Lenn hag un hanter- eur Skrivañ.

(1) Skol noz a vije graet ivez, da arvestiñ ouzh al loar hag ar stered, ha desket e voe trec'hiñ war an aon en noz, ha da adkavout un hent en deñvalijenn (en deiz e oa anavezet al lec'hioù en diaraog).

Goude merenn e kaned ha, bep eil devezh, e veze a-bep-eil gant ur gentel istor pe c'hoazh douaroniezh. Lenn, betek an amzer-c'hoari.

War-lerc'h an amzer-c'hoari :

- *Lun* : Naturoniezh ha tresañ ;
- *Meurzh* : Embregerezh-korf ha labourioù-dorn ;
- *Merc'her* : Naturoniezh ha tresañ ;
- *Gwener* : Naturoniezh ha tresañ ;
- *Sadorn* : Galleg (un eurvezh) ha kan.
- *D'ar yaou e oa* : Embregerezh-korf, c'hoari, studi diouzh ar beure), baleadenn, tresañ, livañ, labourioù-dorn er skol, kan, embregerezh-korf er-maez.

An eil bloavezh e voe ingalet an danvezioù-studi evel da heul : KP = Klas prientiñ ; KE = Klas elfennel.

A-raok lein, 7.15 - 8.15 : Embregerezh-korf : lein (kafe ha bara 'mann) ; skol, ur c'hard-eur kan.

LUN. — Eus 9 eur da 9 eur 55 : KP, Jediñ (poelladennoù) ; KE, Eilskrivadenn, Jediñ.

Neuze, evel bemdez, pemp munut amzer-c'hoari.

10 eur 5 - 10 eur 30 : Geriadur, Pleustradenn-brezek ;

10 eur 30 da 11 eur : KP, Poelladenn ; KE, Lenn.

Neuze, evel bemdez, pemp munut amzer-c'hoari.

11 eur 5 - 11 eur 20 : KP, Lenn ; KE, Skrivadenn-sonioù ;

11 eur 30 - Kreisteiz : KP, Eilskrivadenn ; KE, Lenn.

Goude pred e kroged bemdez gant ar c'han ha neuze, da c'hortoz an amzer-c'hoari e oa un abadenn lenn ha skritur a-bep-eil etre KP ha KE (1/2 an amzer : lenn ; hanter all an amzer : skrivañ).

D'al Lun, adalek 15.5 betek 16 eur : Istor (kentel buhezegezh) evit an holl. Neuze, evel bemdez 5 munut amzer-c'hoari, neuze Displegerezh ha Buhez ar Gelted Kozh.

MEURZH. — Evel d'al lun, nemet :

da 10 eur 5 : KP, Yezhadur (reizhskrivañ) ;

KE, Poelladenn-lenn ha tresañ.

da 11 eur 5 : KP, Lenn, eilskrivañ pe : poelladenn-yezhadur ;

KE, Poelladenn-jedoniezh, ha lenn.

Goude pred : Douaroniezh, labourioù-dorn.

MERC'HER. — Evel d'ar meurzh, nemet :

da 10 eur 5 : KP, Sevel frazennoù, o reizhañ ;

KE, Lenn, eilskrivañ.

da 11 eur 5 : KP, Lenn, tresañ ;

KE, Skrivadenn sonioù, lenn.

Goude pred : Naturoniezh, tresañ.

YAOU. — Embregerezh-korf, kan en ur gerzhout, kempenn pe ginklañ ar skol, sonerezh, kan.

Goude pred : Kan (en ur gerzhout), Bale betek koan.

GWENER. — Evel d'al lun, nemet, goude pred : Naturoniezh, embregerezh-korf (gouren), c'hoari.

SADORN. — Evel d'ar meurzh, nemet, goude pred : Istor (danevelloù), displegerezh, ha c'hoari.

Bemdez adalek c'hwec'h eur betek koan : Studi

Un deiz avat, eus Lanuon e teuas un enseller : « Je voudrais vous voir en particulier, » emezañ, ar pezh a voe kaoz ma voe lesanvet an Aotrou Partikulier. An enseller-se, a oa eus ar Poatou, ne gomprenas grik er c'haieroù. « Evidemment, cela pourrait être intéressant pour l'étude du français (!!)... » Ret avat, serrañ *diouzh* ar skol guzh (« clandestine »). Gwir eo e oa bet disoñjet he diskleriañ... d'ar C'hallaoued. Termet o dije, amzeriet, hag ar skol a vije bet manet... e skouarn ar c'had ! — O, diskleriet e voe, ez-reizh, met neuze ne oa ket kavet mat an ti. Soñjit 'ta, enep al lezenn eo kement-se, ne weler ket ar privezioù eus ar sal-skol. Neuze, diskleriadenn pe get, ne oa ket mat. Hag ar skol guzh a chomas digor. Moarvat ne voe kredet ober netra enep dezhi rak ne voe keloù ebet ken eus an Aotrou Partikulier, nag eus an Enseller Akademi en devoa hen kaset.

Met dont a reas ar mareoù diaes...

Selloù a-dreuz a veze graet gant tud 'zo (n'eo ket gant tud diwar ar maez avat, a vourre o klevout ar vugale o komz brezhoneg, hag o fede ouzh taol dirak peb a vanne sistr, evit ma kanfent !). Evelato, unan bennak, ur paotr kozh eus Kroaz-an-Hae a c'hroz mole war hol lerc'h pa dremenemp.

Gwashaat a rae an traoù evit an Alamaned, a oa stok deomp ha tro-dro. Ret e voe din dilezel ar skol, a-wechoù da vont da blantañ pulioù ouzh ar c'hirri-nij, pe da doullañ

foziou-difenn e Toull-an-Herri, pa ne oa ket evit pilat gwez e Koad-Karrig ! Dont a rae tud en hol liorz. Ur wech e vount-jomp an daol vras ouzh an nor. Ret e voe kas ar vugale d' ar gêr, rak ne voe mui sur an hentoù hag, un devezh a viz Eost, e voe lakaet din ar bistolenn war va bruched dirak va gwreg ha va bugale, hag e voen kaset kuit.

Setu penaos ez echuas Skol Blistin. Ret eo distreiñ d' ar wirionez :

1) Ne voen ket torret eus va c'harg a vestr-skol dindan ar gouarnamant evel m'eo bet lavaret. Me eo, va unan, a gasas va dilez, evit digeriñ ur skol brevez (ur skolaer stadel n' hell ket — hervez al lezenn — digeriñ ur skol brevez).

2) Harzet on bet em skol, n'eo ket evit bezañ graet va skol e brezhoneg. Abeg pe zigarez eo abalamour ma oa un urzh a-berzh archerien Ar C'hastell-Nevez e-lec'h ma oan bet kent sekretour Strollad Broadel Breizh evit Penn-ar-Bed.

N' on ket bet evit adsevel va skol, barnet on bet da chom hep kelenn — zoken an embregerezh-korf ! (Kambr Deskadurezh Pariz). Diouzh an tu all, lez-varn Kemper a dennas diganin va gwirioù keodedad gall ouzhpenn ma tifennas ouzhin kaout annez e Breizh. Evel ma lavarer : kement-se a zo un istor all, met n'eo ket dianav.

Keuz am eus bet alies, o welout e pe bal izel e oa kouezhet an emsav, a-hed bloavezhioù, pa 'z eo bet ranket gortoz 1956 evit gwelout ur skol vrezhonek all evit ar vugale.

A drugarez Doue, savet eo. Meleudi d' an Aotrou Kalvez, rener Skol Sant Erwan, e Plouezeg, hag ivez d' an Itron Galbrun, he skolaerez. Skol-hañv Sant Iltud e Beg-Meilh, Skol vrezhonek Plistin, Skol divyezhek Sant Erwan, ad-skoulmet eo ar chadenn.

20 Eost 1959.

J.L. DEY

TALVOUDEGEZH AR SKOL EVIT AR BREZHONEG

Penaos emañ kont gant ar brezhoneg er skol hiziv an deiz ? Sur a-walc'h ez eus muioc'h-mui a vrezhoneg yaouank ha kozh o teskiñ o gwir yezh, pe gant ar c'hentelioù dre lizher, pe gant ar skolioù. Sur a-walc'h ivez ez ay niver ar skolidi vrezhon war greskiñ, hogen kement-se n'eo ket a-walc'h da lakaat ar brezhoneg en e blom adarre er-maez eus ar skol.

N'eus nemet keverata dregantad ar re a zo o teskiñ brezhoneg er skol gant niver ar skolidi vreizhat en holl er bloavezh 1970-1971 : d'ar mare-se e oa 0,59% eus ar skolidi vreizhat o heuliañ kentelioù brezhonek ! Evel just ez eo aet an dregantad-se war gresk, met arabat fougasañ evelkent.

Breizh a zo div rann enni : unan ma vez komzet brezhoneg abaoe pell enni, hag eben gallekaet pe divrezhonekaet hervez savboent pep hini. Diwiroc'h-diwirañ e teu an dra-se da vezañ bremañ dre ma 'n em sil ar galleg dre holl e Breizh-Izel, hag hevelep tra eo zoken evit ar brezhoneg e Breizh-Uhel, dreist-holl er c'hêrioù bras, hogen amañ diwar goust ar galleg. Kement-se evit diskouez ez eo droch marteze kinnig diskoulmoù a-ziforc'h evit kelennadurezh ar brezhoneg e Breizh-Izel, ha reoù all a vefe da bal dezho advrezhonekaat Breizh-Uhel. Aze n'emañ ket an

dalc'h...

Rankout a ra ar brezhoneg dont-tre er skol, ha ret eo deskiñ anezhañ d'ar vugaligoùigoù da gentañ-penn. Gant ar vugale eo emañ dasorc'hidigezh ar yezh ha n'eo ket gant kevredereziou a bep seurt ar rummoù koshoc'h. Re bell eo bet sanket en o spered ne oa ket ar brezhoneg ur yezh a sevenadur anezhañ, ha dreist-holl yezh "ar Sevenadur". Stardet eo bet va c'halon evit gwir pa 'm eus klevet nepell 'zo div frazenn a-bouez-bras bet lavaret gant Ministr Kentañ ar Vrezhoneg hag ar C'hallaoued : "La langue française ne nourrit aucun impérialisme culturel" ha "Ceux qui apprennent le français dans le monde entier savent bien que c'est une langue dégagée de contradictions politiques"... Kement-se a zo bet lavaret hep na vije aet da ruz gant ar vezh dremm hor ministr.

Daoust da brezennoù a seurt-se bezañ boutin e genou kannaded ar Sevenadur (pep hini en devo komprenet : ar sevenadur latin-gall) arabat e vefe da dud an Emsav genaouegif rak an dra-se. Ur gentel 'zo da zeskiñ adarre. Ar memes hini, d'am soñj : ne dalv ket ar boan goulenn, azgoulenn, daoulinañ ha minañ en ur c'hortoz ma vefe roet un deiz bennak an aotre da stalañ ar brezhoneg er skolioù, evit mat. Pezh a zo bet lavaret gant R. Barre a vo adlavaret gant e ziskennidi moarvat. Pilpouzerezh ar gouarnamant a lakay hemañ da reif bruzunadoù da vezañ ingalet etre tud an Emsav, dezho da devel en ur soñjal : "Emaomp o tostaat ouzh ar pal, tamm-ha-tamm"...

Diouzh boas bewech ma vez ur gudenn bennak e vez un orin ganti, ur skoulm, un abeg... Da bep abeg ez eus un efed. Da gas da get an efed e vez ret kas da get an abeg, anezhañ orin ar gudenn. Splann ha fraezh eo an dra-se. Siwazh, ret eo anzav e vez mesket alies an abeg hag an efed gant stourmerien 'zo. Kement hini hag a zo da bal dezhañ difenn ar brezhoneg a vez a-

du evit lavarout ez eo bet tennet ar yezh eus ar gevredigezh, eus an darempredoù armerzhel ha meles-tradurel peurgetket... Meizet eo bet an dra-se ganto hogen setu int diouzhtu o 'n em lakaat da c'houlenn ma vefe staliet panneloù-lec'h divyezhek dre holl e Breizh-Izel, ma vefe ret kaout eurvezhioù ouzhpenn war ar skingomz ha war ar skinwel, ha me 'oar-me... Kement-se a zo mat da vezañ graet, mat-tre eo, hogen ne vo biken roet en-dro d'ar brezhoneg e blas er gevredigezh er mod-se. Petra a zo o lazhañ hor yezh abaoe ur c'hantved dreist-holl ? Ar skol c'hall ha gallek an hini eo da gentañ-holl (war urzh ur Galloud tuet da greizennañ dreist-penn), setu perak e vo aloubet adarre e blas d'ar brezhoneg dre-holl, nemet gant skoazell da gentañ-holl ivez.

Pezh a zo bet laeret ha kuzhet a rank bezañ roet en-dro ha diskouezet e-giz-se penaos emañ kont gant an deskamant. Arabat eo (e vo) deskiñ brezhoneg, ret eo deskiñ dre ar brezhoneg. Ur pal eo ar brezhoneg evit ar re a zo ouzh hen deskiñ, hogen gwir bal ar brezhoneg eo bezañ ur benveg, anezhañ an hini gwellañ evit tud Vreizh. Pa vo ur benveg anezhañ e vo tu da ginnig d'ar vugale (a zeuio d'o oad diwezhatoc'h) un deskamant enlouchet gant spered ar yezh. Ne vo ket a-walc'h koulskoude !

A-hend-all e vez ret kompren hag en em soñjal war rol ha pouez ar skolioù e n'eus forzh peseurt bro. Dre-se e teu da vezañ anat na pegen divent eo o fouez war emzalc'hioù dazont ar skolidi vihan aet da dud kiriek d'o oberoù a bep seurt.

Ar skolioù, a-hed ar c'hantvedoù, a zo bet a-vis-koazh un doare "brec'h" d'ar Galloud, hini ar Roueed gwechall gozh, hini ar Stadoù hiziv. Un astennadur eo ar skol eus ar reolennoù-kevredigezhel a gaver er-maez anezhi ha desket e vez enni, e doare pe zoare, ar reolennoù a ranko bezañ gouzafvet peurlie-sañ, kuit d'ar vugale da vezañ kollet en ur

gevredigezh damveizet ganto dija pa 'z int yaouank. Evel-just e vez desket an douaroniezh, ar jedoniezh, an istor, ar yezh, hogen kelennet e vezont en doare a kreñvaint ar galloud a-berzh Stad. Perak "nos ancêtres les Romains" a lenner el levrioù da zeskiñ latin, perak "nos ancêtres les Gaulois" e Bro-Euskadi, en Inizi La Réunion hag Hahiti ? Perak ober eus "Charlemagne" Roue Frañs anezhañ tra ma oa o chom en Aac'hen, ha ne gomze nag ar galleg, na yezh ar Franked ?... Perak n'eo ket bet lavaret din emañ o chom tost d'unan eus sevenadurioù keltiek brasañ (La Tène) ?... Bez' e oa drouized o kelenn war lein ar run a zo dres a-dal din pa zigoran prenestr va c'hambri hag an dra-se am eus dianavezet e-pad pell tra ma 'm eus dalc'het soñj eus darvoudoù istorel didalvoud keit-all ivez, met ar re-mañ a oa bet desket din er skol !

Kenkoulz eo lavarout emañ ar skol dindan beli ar re a zo ganto menozioù a-ziforc'h da vezañ gwarezet. E Bro-C'hall, n'eus spered broadel ebet, n'eus ket a unvaniezh vroadel kennebeut, daoust d'ar gerioù "spered broadel" hag "unvaniezh vroadel" bezañ sanket bemdez e penn ar C'hallaoued, pe gant al levrioù pe gant prezegennoù hor pennoù bras, pe dre rediezh, lavaromp en ur ger, dre gaer pe dre heg. Keit-all 'zo ivez e vez roueed ha renerien Bro-C'hall oc'h ober gant ar galleg evit unvaniñ ar menozioù hag ar speredoù, dezho d'asantiñ diouzhtu d'an urzhioù huchet war an talbenn-brezel, dezho da vezañ Gall... "evel ar re all"... Neuze petra eo ar brezhoneg ma n'eo ket ur skoilh war an hent politikel se ? Ur c'hemm a zo bet gant an traoù e-keñver ar brezhoneg bremañ, a drugarez da Vretoned 'zo. Ar vrezhonegerien ne vez ket sellet outo a-dreuz ken, nag e Breizh nag e Bro-C'hall, ne vez ket mui lakaet ar simbol en-dro da gerc'henn ar vugale, met bemdez e vez douget ar simbol diwel bewech ma vez ret d'ar vrezhonegerien mont tre er gourmarc'hadoù, en ties-kêr, er

staloù a bep seurt, hag er skolioù. Petra 'vo ret ober neuze ?

D'am soñj ez ay tre ar brezhoneg raktal e pep lec'h pa vo aet tre er skol da gentañ-penn. Bugaligoù Diwan n'o devo ket mezhus eus o yezh pa vint koshoc'h dre ma 'z eo bet desket dezho d'ur mare ma vez dieub o spered e-keñver ar rakvarnoù a bep seurt e-sell talvoudegezh ar galleg pe ar brezhoneg. War un dro e vo kollet ar rakvarnoù gant o zud...

Arabat trelatif en a-raok evelkent dre ma n'eo ket ar Vrezhoneg mistri war o aferioù diabarzh c'hoazh, hag an darn vrasañ n'o deus ket desket penaos tremen hep an aluzen stlapet bep an amzer gant uhelgargidi, stad enno o welout strivadenoù emsaverien 'zo, graet dreist-penn-biz a-wechoù, hep ur dezrann fraezh ha resis eus diazezennoù hor c'hevredigezh a-vremañ. Dalc'homp soñj ez eo kiriek ar "galleg", ha difennourien ar "Vroad C'hall", da gudennoù Breizh a bep seurt, hag anzavomp n'eo ket aet an traoù war wellaat gant levezon ar gevalaouriezh, ur c'hant vloavezh hanter bennak 'zo.

keleier skrid

KENDALC'H KELTIEK 1980 a vezo graet e DULENN, eus an 28 a viz Gouere betek an 2 a viz Eost. Lojet e vo an dud e St. Patrick's Training College, Drumcondra, hag eno ivez e vo graet ar bo-dadegou. Evit en em enskrivan ha kaout diskleriaduriou, eo ret skrivan da: Loig CHAPEL, Roc'h ar Bleiz, 29 210 MONTROULEZ.

CRASH COURSE 1980 a vo graet e Skol Veur ROAZHON, eus an 30 a viz Even betek ar 5 a viz Gouere. Renet eo ar c'henteliou gant Per Denez. Ma fell deoc'h kemer perzh, skrivit da: Formation Continue, U.H.B. 6 av. Gaston Berger, 35 043 ROAZHON CEDEX.

AL LANV, ur gelaouenn vrezhonek nevez o paouez dont er-maez. Pennadoù a bep seurt a vez kavet da lenn en niverenn gentan. Ret eo sikour AL LANV, ret eo koumanantin. 30 lur (50 lur skoazell) da AL LANV, 7 straed Recteur-Henry, 35 000 ROAZHON.

BREMAN, kazetenn savet gant tud Skol an Emsav. Gouestlet eo an niverenn 0 d'an nukleel ha d'ar yezh. Evit koumanantin: 20 lur (30 lur skoazell) da BREMAN, 8, straed Hoche, 35 000 ROAZHON.

PESKETOURIEN DOUARNENEZ a zo titl niverenn a-zeu HOR YEZH. Testeniou dastumet e Douarnenez eo a vo tu da lenn e-doug ar 180 pajenn. An doareoù o doe ar re gozh da sevel ar bagoù, da besketan, da vageal, ar vuhez war an aod ha war ar mor, ar stourmoù politikel hag all, kontet gant ar re o deus bevet kement-se. Priz: 45 lur. Hor Yezh, 1 Plasenn Ch.Péguy, Poullbriant, 29 260 LESNEVEN.

HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH SAVET GANT
ARZEL EVEN

KOUMANANT : 40 LUR, DA CCP DENIS
1499-51 ROAZHON

CHEKENNOU-BANK: P.DENEZ , RI , PLOARE
29 100 DOUARNENEZ

AL

LANV

KOUMANANANT : 30 LUR. SKOAZELL : 50 LUR.
AL LANV, 7 STRAED RECTEUR-HENRY
35 000 ROAZHON.

